



War varc'h

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv?

etre 8 ha 24 c'hoarier a ranker kaout

Ezhomm e vez :

- Un dachenn brasik a-walc'h
- NB : An dachenn a rank bezañ bevennet sklaer a-bep tu
- Skipailhoù ingal a-fed niver c'hoarierien (un niver par a zo ret kaout evit pep hini)

Ar staliañ :

- Rannet e vez pep skipailh e div lodenn. Un hanter eus ar skipailh a vez staliet eus un tu d'an dachenn hag egile en tu all dres e-tal ar re all.
- NB : Hirder an dachenn a c'hell cheñch diouzh oad ar vugale

Pal ar c'hoari :

- Lakaat holl dud ar skipailh da dreuziñ - ar buanañ posupl -an dachenn d'eus an eil tu d'egile.

Penaos e vez c'hoariet :

Skouer evit ur skipailhad a 4 den. (niverennet deus 1 da 4)

Ar c'hoarierien 1 & 2 a zo deus un tu, an eil a-dreñv egile. Ar c'hoarierien 3 & 4 a ra heñvel en tu all dres e-tal dezho.

Pa vez roet urzh da loc'hañ e treuz an niver 1 an dachenn. Ur wech en tu all e samm an niver 3 war e gein hag e tistro daved an niver 2. Echu eo evitañ.

An niver 2 a lamm war gein an niver 3 hag ez eont en tu all daved an niver 4. Echu eo evit an niver 3.

An niver 4 a lamm war gein an niver 2 da vont betek an niver 1.

Echu eo evit an niver 2. An niver 1 a sav war gein an niver 4 ; treuziñ a reont an dachenn. Echuet eo evit ar skipailh.

- Mont a ra ar maout gant ar skipailh kentañ da echuiñ ar redadeg.